

DISKENNIT EUZ AN NEÑVOU

L. = 69

Dis - ken - nit euz an neñ - vou, Spe - re - jou e - vu - ruz.
 Deut a - dar - re da_ gan - (n)a meu - leu - di da Je - zuz.

Em - ban - nit e va - de - lez dre gan - ti - kou a c'hloar; —

Di - goue - zet eo a - ne - vez ar peoc'h war an dou - ar!

Fin

1. { Di - wan - (n)et 'zo - eur ro - zenn war wri - zienn I - za - i.
 N'eus ket en oll li - or - zou eur vleu - nienn e - vel - ti.
 2. { Ar vamm he - deus _ e c'han - (n)et a zo an - vet - Ma - ri.
 Ar c'haer - ra euz _ an ê - léz 'zo ne - beud di - ra - zi.
 3. { "Se - la - out, a - la - va - re an êl d'ar bas - to - red,
 An tu d'e a - na - ve - zoud se - tu deoc'h dis - kiê - riet:

1.E - vel eur flour - di - li - zenn sa - vet e - kreiz _ an - drez
 2.Ar Spe - red San - tel e - neus he choa - zet da _ bri - ed
 3."Ar bu - gel 'zo mail - lu - ret en eur c'hraou - ig _ dis - ter,

D.C.

1.Euz eur we - zenn _ a be - hed eo deut ar zan - te - lez.
 2.E - vid be - za _ Rou - an - (n)ez e Pa - lez an _ Drein - ded.
 3.War eun tamm plouz _ as - ten - net, hen - nez eo ho _ Sal - ver."

**D: Diskennit euz an neñvou, Sperejou evuruz.
 Deut adarre da gana meuleudi da Jezuz.
 Embannit e vadelez dre gantikou a c'hloar;
 Digouezet eo a-nevez ar peoc'h war an douar !**

1. Diwanet 'zo eur rozenn war wrizienn Izai.
 N'eus ket en oll liorzu eur vleunienn evelti.
 Evel eur flourdilizenn savet e-kreiz an drez
 Euz eur wezenn a behed eo deut ar zantelez.

2. Ar vamm he-deus e c'hanet a zo anvet Mari.
 Ar c'haerra euz an êlez 'zo nebeud dirazi.
 Ar Spered Santel e-neus he choazet da bried
 Evid beza Rouanez e Palez an Dreinded.

3. "Selaouit, a lavare an êl d'ar bastored,
 An tu d'e anavezoud setu deoc'h diskleriet:
 "Ar bugel 'zo mailluret en eur c'hraouig dister,
 War eun tamm plouz astennet, hennez eo ho Salver."

DESCENDEZ DU CIEL

R: Descendez du ciel, Esprits bienheureux,
 Venez encore chanter les louanges de Jésus.
 Proclamez sa bonté par vos cantiques de gloire;
 Voici que la paix est de nouveau descendue sur terre !

1. Une rose a germé de la racine d'Isaïe.
 Il n'y a pas dans nos jardins une fleur aussi belle.
 Comme un tendre gazon poussant parmi les ronces
 D'un arbre de péché est apparue la sainteté.

2. La mère dont Il est né s'appelle Marie.
 Le plus bel ange n'est rien à côté d'elle.
 L'Esprit qui l'a choisie pour épouse
 En a fait une Reine au palais de la Trinité.

3. Ecoutez, disait l'ange aux bergers,
 La façon de Le reconnaître, la voici, pour vous, déclarée :
 "L'enfant est emmailloté dans une pauvre petite crèche,
 Allongé sur un peu de paille, c'est Lui votre Sauveur."